

## Per Denez

Aet eo Per Denez d'an Anaon d'an 30 a viz Gouere. Tizhet gantañ e 90 vloaz e oa en em dennet eus bed turmudus ar stourm evit ar brezhoneg un nebeud bloavezhiou zo. Dleet eo degas da soñj ar pezh en deus degaset d'ar brezhoneg ha da Vreizh en XXvet kantved ha petra eo bet e hent.

Breizhuhelad e oa Per, hag eñ bet ganet e 1921 e Roazhon Ez-yaouank e voe dedennet gant yezh piaouel Breizh : ar brezhoneg hag e krogas d'he deskiñ da 13 vloaz. Krouet e oa bet *Gwalarn* e 1925, hag e gresk en doa graet luskad hollbouezus Roparz Hemon, pa oa Per Denez o tremen a gennard a zen yaouank. Siwazh e voe paket iveau, evel ur bern tud d'ar mare-se, gant an droug-skevent. E greñv a zeuas a-benn da gemer war ar c'hleñved. Merket eo bet e holl vuvez gant ar mare-se avat. A-bouez e oa kement minutenn bevet hag ar pezh a oa tu d'ober diouzhtu ne oa ket da vezañ daleet. E-doug ar prantad kleñved-se en em roas d'ar skrivañ ha d'an treiñ iveau. Ar pezh a reas a-hed e vuvez war-lerc'h gant reiñ atav ur plas a bouez d'ar marv en e skridoù.

Goude ar brezel e 1945, d'an oad a 24 bloaz, e c'hellas adstagañ gant e studioù er Skol-veur. O stourm ouzh an dorzhellegezh e oa bet e-pad 6 vloaz. Prientiñ a reas un aotreegezh war ar saozneg eta. Ur bloavez a dremen a Skol-veur Aberdeen, e Bro-Skos. Tapet e aotreegezh gantañ ez eas da gelenner war ar saozneg. Goude Kemper hag ur prantad pellaat e Perigueux e stagas da gellen e skolaj Douarnenez. Eno e stagas da studiañ brezhoneg ar vro. A bouez bras e oa evit Per Denez studiañ an holl zoareoù komz ha nac'hañ a rae krenn lakaat un urzhaz etre an doareoù-komz-se rak evitañ e oa kement ha lakaat un urzhaz etre an dud iveau. Argas a rae krenn implij ar ger "trefoedaj" da skouer.

Un dezenn a dremen war brezhoneg Douarnenez. Kement-se a roas an tu dezhañ da vont tre evel mestr-prezegenner e kevrenn ar brezhoneg e Skol-veur Breizh-Uhel. Kemer a reas penn ar gevrenn ha kelenn a reas 21 bloaz eno. Pa oa erruet er gevrenn ne oa na DEUG, nag aotreegezh, na CAPES war ar brezhoneg avat. Istor ur stourm hir e vo diframmañ an diplomoù hag ar genstrivadeg-se. E 1981, goude dont a-benn da lakaat prezidant nevez ar Republik François Mitterrand er jeu, e voe gounezet an aotreegezh. Kenstrivadeg ar c'hapes a voe gounezet e 1986 hag an DEUG e 1989. Ur c'hursus klok a oa neuze d'ar brezhoneg evel n'eus forzh peseurt yezh europat all. E lod en deus degaset war-eeun Per Denez iveau evit aesaat an deskiñ brezhoneg. Brudet bras eo bet e hentenn "Brezhoneg buan hag aes". E chañs en doa roet neuze d'un tresour yaouank-flamm hag a zo brudet bras bremañ e Breizh : Nono.

Prezegenn **Lena Louarn** evit enoriñ **Per Denez** epad oferenn e brezhoneg an Emvod ar Gelted en Oriant d'ar 14 a viz Eost 2011

Un den digor war ar bed ha karadek ouzh an dud e oa Per Denez. Ouzhpenn ar saozneg e teskas meur a yezh all : div yezh keltiek all, kembraeg hag iwerzhoneg hag esperanteg zoken. E spered Gwalarn bepred e felle dezhañ digeriñ prenester ar brezhoneg war ar bed. Kalz a droidigezhioù a reas evit pinvidikaat ar brezhoneg ha lakaat ar Vretoned da anavezout doareoù all da welet ar bed. Un oberenn lennegel en deus savet iveau avat. Un toullad mat a zastumadoù danevelloù ha romantoù zo bet embannet gantañ.

Dre ma oa Per Denez den an ober, pa gave dezhañ e vanke un dra bennak... e save anezhañ. Diouzhtu goude ar brezel e voe savet gantañ ar gelaouenn lennegel *Kened*, un titl hag a zo evel un dae goude euzh ar brezel. Kendeuzziñ a raio gant *Al Liamm* nepell goude. E penn kentañ ar gelaouenn yezhoniezh *Hor Yezh* e voe iveau, bet krouet gant e geneil Arzel Even e 1954 hag e teuas da vezañ ar rener anezhi. Er bloavezhoù '60 e reas war-dro ar gelaouenn politikel ha sevenadurel *Ar Vro*. Hag e deroù ar bloavezhoù '80 e savas an ti-embann *Mouladurioù Hor Yezh*.

Anavezet eo bet labour Per Denez e Breizh koulz hag en estenvro. "Breizhad ar bloaz" e oa bet e 1981, ar bloaz ma oa bet gounezet an aotreegezh vrezhoneg. Kolier Urzh an Erminig a oa bet roet dezhañ e 1989 e Naoned. Mignon da Catalonia e oa iveau ha Kroaz San Jordi a voe roet dezhañ e 1993 gant Jordi Pujol, prezidant ar Generalitat. Doktor *honoris causa* skolioù-meur Iwerzhon ha Kembre e oa iveau.

En tu-hont d'e labour skolveuriad e oa oberiant Per Denez e bed yezh ha sevenadur Breizh. Prezidant Kuzul ar Brezhoneg, bodad aozadurioù sevenadurel brezhonek, e voe betek nevez zo. E-touez an dornadig tud a c'hounezas Karta sevenadurel Breizh e 1978 e voe, ha prezidant Kuzul Sevenadurel Breizh e voe adalek 1980 betek 1993. Ur perzh bras a gemeras iveau e buhez Skol-Uhel ar Vro ha kentañ prezidant e Guzul skiantel ha luskañ e voe. Ha d'ar 1añ a viz Mae 1999 e oa o kadoriañ emvod-meur diazezañ Ofis ar Brezhoneg e ti-kêr Karaez.

Unan eus tud veur ar brezhoneg en XXvet kantved ez eo Per Denez. Unan eus ar re o deus graet ar pezh a soñje dezho a oa ret ober hep gortoz aotre pe bennozh ar Galloud. Un den en e sav. Ha, dreist pep tra, un den en deus gouezet enaouiñ fulenn ar fiziañs e dazont ar yezh hag ar vro e nouspet kalon.

Lena Louarn  
Besprezidantez Kuzul-rannvro Breizh

Prezegenn Lena Louarn evit enoriñ **Per Denez** epad oferenn e brezhoneg an Emvod ar Gelted en Oriant d'ar 14 a viz Eost 2011

## Per Denez

Per Denez nous a quittés ce 30 juillet. Il a atteint l'âge de 90 ans. Cela faisait bien sûr quelques années qu'il s'était retiré du monde agité de la lutte pour la langue bretonne. J'aimerais rappeler ici son apport à la langue bretonne et à la Bretagne au XXe siècle et quel a été son parcours.

Per était Haut-Breton, né à Rennes en 1921. Tout jeune il fut attiré par la langue propre de la Bretagne : le breton. *Gwalarn* avait été créé en 1925, et le mouvement primordial de Roparz Hemon s'est développé alors que Per Denez, d'adolescent devenait un jeune homme. Hélas il fut également rattrapé, comme beaucoup à cette époque, par la tuberculose. Il réussit à vaincre la maladie mais il en resta marqué pour le restant de ses jours. Chaque minute devait être vécue pleinement et ce qui pouvait être fait tout de suite ne devait pas être remis. C'est pendant ces années de maladie qu'il commença à s'adonner à l'écriture et à la traduction. Ce qu'il fit tout au long de sa vie par la suite, le thème de la mort gardant une place importante dans ses écrits.

Après la guerre, en 1945, à l'âge de 24 ans, il put reprendre ses études à l'Université. Il avait lutté contre la tuberculose pendant 6 ans. Il prépara donc une licence d'anglais. Il passa une année à l'Université d'Aberdeen en Écosse. Une fois sa licence en poche il devint tout naturellement professeur d'anglais. Après Quimper et une période d'éloignement à Périgueux, il revint enseigner au collège de Douarnenez. Là, il entreprit l'étude du breton du pays. Per Denez attachait une grande importance à l'étude de toutes les formes d'expression et refusait d'introduire une quelconque hiérarchie entre elles. Car, pour lui, cela revenait à introduire une hiérarchie entre les personnes. Ainsi il récusait totalement le terme de "patois".

Sa thèse eut pour thème le breton de Douarnenez. Elle lui permit d'entrer en tant que Maître de Conférences à la section de celtique de l'Université de Haute-Bretagne. Il prit bientôt la tête de la section et y enseigna 21 ans. À son arrivée à l'Université il n'existe ni DEUG, ni licence, ni CAPES de breton. L'obtention de ces diplômes et de ce concours seront l'histoire d'une longue lutte. En 1981, après avoir réussi à faire intervenir personnellement le nouveau président de la République François Mitterrand, il obtint la création d'une licence de breton. Il fallut attendre 1986 pour le Capes et 1989 pour le DEUG. Le breton disposait alors d'un cursus universitaire complet comme les autres langues européennes. Per Denez a également apporté sa contribution pour renouveler les méthodes d'apprentissage. Sa méthode "*Brezhoneg buan hag aes*" (Le breton vite et facilement) connut un grand succès. Il sut aussi donner sa chance à un tout jeune dessinateur aujourd'hui incontournable en Bretagne : Nono.

Prezegenn **Lena Louarn** evit enoriñ **Per Denez** epad oferenn e brezhoneg an Emvod ar Gelted en Oriant d'ar 14 a viz Eost 2011

Per Denez était un homme ouvert sur le monde et aimant les gens. En plus de l'anglais, il fit l'apprentissage de plusieurs autres langues : deux autres langues celtiques par exemple, gallois et irlandais et même l'espéranto. Toujours dans l'esprit de *Gwalarn* il voulait ouvrir les fenêtres de la langue bretonne sur le monde. Il a à son actif de nombreuses traductions pour enrichir la langue bretonne et faire connaître d'autres façons de voir le monde aux Bretons. Il a également créé une oeuvre littéraire composée de nouvelles et de romans.

Per Denez étant un homme d'action, lorsqu'il décelait un manque il n'avait de cesse de le combler. À peine la guerre terminée il lançait une revue littéraire, *Kened*, ce qui signifie "Beauté", titre qui sonne comme un défi après les horreurs de la guerre. Elle fusionna rapidement avec *Al Liamm*. Il fut également collaborateur de la première heure de la revue de linguistique *Hor Yezh* (Notre langue), créée par son ami Arzel Even en 1954 et en devint le directeur. Dans les années 60 il se consacra à la revue politique et culturelle *Ar Vro*. Et au début des années 80 il fonda les éditions *Mouladurioù Hor Yezh*

Le travail de Per Denez a été reconnu en Bretagne comme à l'étranger. En 1981 il était "Breton de l'année", année de l'obtention de la licence de breton. Le collier de l'Ordre de l'Hermine lui fut remis en 1989 à Nantes. Il était également un grand ami de la Catalogne et Jordi Pujol, président de la Generalitat, lui remit la Croix San Jordi en 1993. Il était par ailleurs Docteur *honoris causa* des Universités d'Irlande et du Pays de Galles.

Au-delà de son travail universitaire Per Denez était des plus actifs dans le monde de la langue et de la culture bretonne. Jusqu'à peu il était président de *Kuzul ar Brezhoneg*, groupement d'associations culturelles de langue bretonne. Il fut également parmi la poignée de militants qui arrachèrent la Charte culturelle de Bretagne en 1978 et fut président du Conseil Culturel de Bretagne de 1980 à 1993. Il joua un grand rôle à l'Institut Culturel de Bretagne et fut le premier président de son Conseil Scientifique et d'Animation. Enfin, le 1er mai 1999, il présidait l'assemblée générale constituante de l'Office de la Langue Bretonne en mairie de Carhaix.

Per Denez est et restera une des grandes figures de la langue bretonne au XXe siècle. Un de ceux qui ont fait ce qu'ils pensaient nécessaire, sans attendre d'autorisation ou de bénédiction du Pouvoir. Un homme debout. Et, par dessus tout, un homme qui a su faire naître une étincelle de confiance dans l'avenir de la langue et du pays dans le coeur d'innombrables Bretons.

Lena Louarn

Vice-présidente du Conseil régional de Bretagne